

**KANTIK****Intron Varia Kerellon**

VAR DON : Intron Varia ar Porzou.

DISKAN :

Ni ho salud, Guerc'hez Vari,  
En ho chapel Kerellon ;  
Deut omp herio d'hoc'h henori,  
D'ho pedi a vir galon.

1

Aman, 'baoue meur a gantved  
Eo direded hon tadou,  
Hag aman ho deuz resevet  
Dre Vari kalz a c'hrasou.



2

Aman, neb a zeu da c'houlen  
Digathi grasou neve,  
E ve primm kasset he beden  
Dreizhi beteg trôn Doue.

3



Ar groagez kristen d'he chapel  
'Veler o tont aketuz,  
Da c'houlen bennoz ha skoazel  
A benn an heuriou poaniuz.

4

Pa ve d'ê ganet eur bugel,  
Ar mammou a zeu ive  
Da bedi ar Verc'hez santel,  
Mamm ha magerez Doue.

5

E Kerellon, peb guir gristen  
'Gav sikour e peb mare  
Da drec'hi he enebourien,  
Ha da vont varzu an Ee.




6

Ar Verc'hez deuz peb seurt danjer,  
Deuz ar gurun, an tan gwall  
A voar ato, pa he feder.  
Astenn he dorn d'hon diouall.

7


Da renta henor d'ar Verc'hez  
Euruz neb a zo fidel ;  
Dreizhi e vo sur eun devez  
Da gaout eur maro santel.



PERMIS D'IMPRIMER :

*Ce 10 Mai 1902.*

F. CORRIGOU, VIC. GÉN.





MONTROULEZ, IMPRIMIRI LE GOAZIOU